

203

375

PEDENNO

VIT

ZOUDARDED ARMÉ FRANS HAG HO C'HERENT



Otro, bezet truez ouz hon breuder.
 Otro, bezet truez ouz hon breuder.
 Otro, bezet truez ouz hon breuder.
 Zantez Mari, mam Doue,
 Zantez Mari, mam druézus,
 Guerc'hez meurbed galloudus,
 Guerc'hez meurbed mād,
 Tour David,
 Iéc'hed ar ré glan,
 Diboagneres ar ré drubuliet,
 Réfuj ar bec'hérien,
 O Mari, konsévet hep pec'het,
 Zant Mikael, patrom Frans,
 Zant Louis,
 Æle zantel, karget gant Doue d'ho diwal,
 Zant Moris, patrom ar zoudarded,
 Zent ar Barados a bere hò deuz an enor
 da zougen an hano,
 Zant Joseb,

}
 Pedet vit-hé.

A bep pec'het,
 Euz ar goler hag ar gasoni,
 Euz displealdet ha tolio an énébour,
 Euz ankénio ha tristidigez ar maro,
 Euz eur gwall-varo,
 Dre hô passion boaniuz,
 Dre hô tilez hag hoc'h hirvoudo,
 Dre hô flagellation hag hô kurunamant
 . spern,
 Dre hoc'h agoni,
 Dre hô maro,

Diwallet anézhe, Otro.

O ma Doue! miret iac'h ha divac'hagn hô zervierien; gred ma lakfont ennoc'h hô holl fizians. Ma Doue, bezet hô diwal hag hô ners dirag an énébour.

PEDEN.

O Jésus! c'houi a zô bêt zentuz béték ar marô ha béték marô ar groaz, zellet gant madélez ha benniget kalon ha zentidigez dispar hon breûder. Teurvéet digémer hô zacrifis vit gloar hô Tad, zilvidigez hô inéo, hag hénor hon brô! — Evel-sé bezet groet!!

Hô pézet sonj, ô Mari, Guerc'hez meurbet trugarézuz! pénôz na zô bêt biskoas klevet dén ô lavarout hô pijé dilézet hini ar ré zô bêt et, d'hô kaout, hô deûz goulennet hô skoazel hag hô kémeret vit mirerez. Leûn ha kennerzet eûz ar memes fizians, ô

Guerc'hez! Mam ar guerc'hezed, ò hon Mam! ni a deù d'hô kaout. Dindan hô tiou-askel a vam holl gallouduz eo a fell d'imp lakaad hon oll breûder an armé, da gentan hon c'hérent, hon mignounet hag hon holl genvrôiz. Dreist peb tra; grwet dezhe kaout pardon eûz hô fec'héjô. Skoazellet anezhe... difennet anezhe... Pellaît diout-hê pep gwall-eûr ha gred ma rétorfont enn hon zouéz! Mar-g-eo bolanté Doué ma véfont flemmet, o Mam a holl drugarez! roet dézhe ners da dréc'hi, pasiantet da c'houzanv, ha, ma renkont koll hô buez, gras da vérvél en peûc'h! hag évidomp, Mam druézus! kalon da n'em derc'hel gan-hec'h var ar c'halvar, oûz troad ar groaz, 'nn eur éva vel-d-hoc'h bétek al liou ar c'hal-léi-zé c'huéro a dristidigez hag a garanté unanet gant zakrifiz hò Mâb muia-karet; ha, daoust pétra a ouffé c'hoarvéout, ma atlarféomp a greiz kalon, dré garanté évit Doué : *Ma Doué! ho polanté ra vézo graët, ha nan hon hini!* O, Mam déner! sêtu ni daoulinet oûz hô treid, oc'h huanadi dindan ar zamm eûz hon féc'héjô; na zisprijit két hon fé-dennô dister; mez plijet gan-hec'h hô sélaou ha rei d'imp hon mennad! Evel-sé bézet gret!!

Itrôn Varia ar Viktoario, pédet vit Frans! Neo két avoalc'h pédi. Bemdé, kinnigomp gant kourac'h eur zakrifiz bennag da Zoué, dré intersesion ar Verc'hes. Lakéomp inéo ar purgatoar a dû gant hon breûder meurbed kér an armé. Dreist-holl, na ankounac'homp két eo ret d'hon c'halon béza pûr vit ma néfo hon fédenno talvoudégez dirag Doué. Mar éman éta ar péc'het var hon c'honsians, buan has-

tomp ôber eur govizion vâd, ha goudé, eur gomme-
nion zantel. Kément-zé a raïo disken bénnoziô an
Env var hon breûder meurbed karet deûz ann
armé.

* Moulet gant otré ann Otro'nn Eskob a Zant-Briek hag
a Landreger.



LANHUON, E TI ANGER, MOULER-LEVRER.